

Au fol° 26 recto, titre (au crayon): Marc'hadour Rouan 72
Kaes?
7.

(f° 26 verso)

Marc'hadour Rouan.

Marc'hadourien iaouank deus ar ger a Rouan,
Mar ged da Kahas da foar cal ar goan.

Na neth ket da lojan d' an ti bras a rohan
enan e ve lazget ar marc'hadourien bihan.

Ar marc'hadour bihan wa joaus he c'halon
gant ur c'h[ou]itel arc'hant en fin an deiz o son.

Margodik materzik dre ma he a ma te
Nag a selle outan ag a c'huanade.

O marc'hadour iaouank c'hui zo ge o c'halon
A benn an anter noz c'hui zo changet a son.

Plac'hik plac'hik bihan na dime leveret
Dre ma hed na teuet perag c'huanadet.

Allas marc'hadour iaouank mar bed en ho kuele
Abenn an anter noz he vo kollet ho buer.

Bezan euz eur kleve noaz ~~de~~ dindan pen ho kuele
A zo laket enon d'ho lazga en oc'h ure.

Neket bed goalc'het c'hoas aboue eo lazget an tervet
C'hui marc'hadour iaouank a vezo ar peveret.

Plac'hik materzik bihan, recours din ma bue
ha me krayo pinvidik a pemp Kant skoet leve

Otrou marc'hadour bihan, me o ped leveret
Pe c'hui a zo demezet pe c'hui otrou na noc'h ket.

(f° 27 verso)

Margodik materzik me na no trompo ket
Kar dilun diverzan e woa bed ma euret.

236

Teir nozvez e hon bed, Kousket gant ma pried
Red e woa dont aman ha kuitad euvreted.

Mez me a meus tri breur en servich ar roue
a zo ge a galant, dispos Kerkouls a me

Margodik materzik c'houi po ar choas a ne
Pa vimp arvu er ger c'houi gwelo m'a ligne.

O marc'hadour iaouank Kemer prompt pantouffou
E man d'ha marc'h er porz a da pistollennou.

Sinvas da Kof arc'hant a zo gant an otrou
Margodik lez anker⁽¹⁾ na vankomp ket heñ trio.

Eman Margod ag eon war un ankane gwen
ebrezek ger Rouan o monet pen da ben.

Ar hostis deus an ti an ti bras a Rohan
ha c'halvas materzik evit c'houeza an tan

evit ma vije gret affer ar marc'hadour bian
allas diskulliet eo bed en he ty he unan.

An ini goz arzet er c'hogn kichen an tan
A respontas d'he mest en ger prest a buhan:

Margodik materzik ne medi ket aze
Ed eo gant ar bon garçon war c'hein ur ankane

Mar gwiffen e ve te a neve ma diskulliet
Te a ve ar gentan e me c'hoant da lazet.

Nep a welle Margodik woa pareou Rouan
heñ he trait ur boutou skan a lerrereou stam moan

(manga du f'
27 verso).

eureujet eo ganti breur ar bon garçon bian
e deves sauveted deus ti bras a Rohan.

3

Made de 5^e fripp.

8 avril 1937

J. Ollivier

(1). - e (de: ane) evit en surcharge war: on.